

KANTIK NEVEZ

Buez SANT ERVOAN

EVIT AR BLOAVEZ 1887

- Deut holl da glevet eur c'hantik nevez,
Gret da Sant Ervoan, mignoun da Zoue. (bis.)
- Nø neus ket en Breiz, ne neus ket unan,
Vefe zantelloc'h eget Sant Ervoan.
- Autrou Sant Ervoan dre e c'hraç divin,
A zo bet ganet en maneur Kervarzin. (bis.)
- E dad hag e vam ho daou a veve,
En zanteles vras, en doujanç Doue. (bis.)
- A guichen ar gear deus a Landreger
E ganet maget dre eur c'hraç ken kaer, (bis.)
- E dud pinvidig, hag a galite,
Ho daou e vevent en karante Doue. (bis.)
- Rei a rejont eur maestr d'hor mabik Ervoan,
Da ziski anezhan d'en lemel a boan. (bis.)
- Goude ho kavont ho bugel disket
Eun alvokad mad, eun den zantel meurbet. (bis.)
- Profita a ra deus a dout assambles
Ebars er studi hag en santeles. (bis.)
- Eur speret ar c'haera n' d'oa sant Ervoan
Eus ar skiantchou golle ket e boan. (bis.)
- D'he bevarzek vloaz, pa 'n deua echuet
D'ar gear a Baris n'eus c'hantet monet (bis.)

- A dre ma gleve maestr bras ar skoliou,
Tigor e speret 'vit ar skiantchou. (bis.)
- Ebars er gear-ma eure gwelet
Hag e santeles, ive e c'henet. (bis.)
- Ar studi kaera oa gant-han disket
Deur re habilla vije bet kavet. (bis.)
- Karantez Doue oa en he galon,
Rag bembe a rê, peden, oreson (bis.)
- Ar c'hig, ar pesket, vije kaset dezhan.
A zistribuit d'ar bevien a oa klanv. (bis.)
- Pa oa pevar bloaz war-n-ugent oaget
Savant bras a leun ive a speret. (bis.)
- N'em lakat a reas, 'vit n'em avanç,
Dont eus a Baris, d'ar gear Orleans. bis.
- Eno gant doktor oa meurbet habil,
E tiskas blam ar gaou dont da zifen ar gwir. bis.
- Jugi rê bepred gant justis erfad,
Bars en pep proces hag en pep debat. bis.
- Neuze e gonsakraa he vue da Zoue,
A dle servicha parfet gant gwir fe. bis.
- Hag he vrevier neuze a recite
Offis ar Verc'hes a lare ive. bis.
- Pa oa e studi gant-han echuet
D'an ofisial oa neuze kaset bis.
- Hanvet barner an Iliz er gear a Roazon,
Da vont gant Moris d'eus an Areagon. bis.
- Eskop Landreger, ben neubeut goude,
En deus informet goude e vue. bis.
- Er pedas da zont neuze da vitan,
Dre an intim 'n deoa dezhan. bis.
- N'Autrou Sant Ervoan, gant humilite vras
D'an eskop santel, raktal a blegas. bis.
- Receo a reas neuze gant gwir zanteles
Dioc'htu an urzou sakr a veleguez. bis.
- An eskop santel, en cure raktal,
Barner an Iliz, hag ofisial. bis.

- Ar qaros tredrez Yan oa roet
Hag en brezounek alies 'n dæus komzet. *bis.*
- Bemde d'ar bevien ra aluzon,
Eur skoer vad oa 'vit ar veloïen. *bis.*
- Eur servicher mad e oa d'hor Zalver,
Alies yune zadorn a gwener. *bis.*
- Eur gouri en reun, war he gorf zouge
En honor pasion Jesus, mab Doue. *bis.*
- Kastia e gorf dre ar binigen,
A bale treid noas, 'vel ar vezerien. *bis.*
- Deus parros Tredrez, c'he da Loufranec,
Dre ma oa karget tud fall milliget. *bis.*
- Oa ket pell ar bobl-se gonvertissas
Touch a re kalon ar bec'herien vras. *bis.*
- Ar justiç a re erves gir Doue
Ebars en he garg a bep kalite. *bis.*
- Autrou Sant Ervoan glask nemet ar gloar,
Dilezel ar madou ha traou an douar. *bis.*
- Gant gwir graç Doue dre e zarmoniou
D'an habitantet douch ho c'halonou. *bis.*
- O vont da brezek eur wech e kavas,
Eur pont goloet gant an dour bras. *bis.*
- Mes ar Zant an dour a arretas kren,
Evit e lezel raktal da dremen. *bis.*
- Eur wech pad ma oa gant an oforen
Oa bet gwelet kalz a sklerijen. *bis.*
- Ar sklerijen oa deut demeus an envou.
En keit ma oa gant-han ar goreou. *bis.*
- Eur wech, toud an eed roe d'ar bevien
Hep ma vire tam dezhan e hunan. *bis.*
- Dre eur mirakl bras sur en em gavas,
Ar c'hriagnol karget demeus a ed kras. *bis.*
- Evit gwele eul laouer, hag eur pluec men
Alies e gouske war an douar yen *bis.*
- Bars en Louhanec, Sant Ervoan glanvas,
Da vaneur Kervarzin, kerkent e c'heas. *bis.*

Kri vije ar galon, kri ma na welje, Maneur Kervarzin neuze nep a vije.	<i>bis.</i>
An aoutrou Sant Ervoan. pa eo bet marvet. Tout ar bevien baour a oa holl glac'harët.	<i>bis.</i>
Marvet eo ar Zant en maneur Kervarzin, A Karget e oa deus a c'hraçou divin.	<i>bis.</i>
Ebars an Iliz eo bet enteret, E gorf santel gant pep honor ha respet.	<i>bis.</i>
Marvet oa war dro e anter-kant vloa, Ervoan Heloury, eun den ar gwella.	<i>bis.</i>
Ar brud diout-han dre holl e oa eat, Kalz a viraklou war he ve oa great	<i>bis.</i>
Eskop Landreger, evel ma klevas Raktal Sant Ervoan e ganonisas.	<i>bis.</i>
Sant Ervoan, zo skoër d'an dud a lezen. D'all labourerien ha d'ar veleien.	<i>bis.</i>
Vit ar bevien geas, hag an dud a boan, Ne neus ket gwelloc'h evit Sant Ervoan.	<i>bis.</i>
Bars en Kervazin, e-kichen an tan, E choumet bepred gwele Sant Ervoan.	<i>bis.</i>
Hag er gwele-se, an dud mahagnied, Pa gouskont enn-han kavont ar yec'het.	<i>bis.</i>
D'an naontek ha vae, devez e bardon, Nep n'eus fians a gavo pardon.	<i>bis.</i>
Evit an de-se, ar belerinet, D'ho holl bec'hejou a gavo remet.	<i>bis.</i>
An hini gano kantik Sant Ervoan, Ebars er bed-ma 'n do neubeutoc'h a boan.	<i>bis.</i>
Ha de bec'hejou kant devez pardon, Ha c'honeo c'hoas m'ar kan ha galon.	<i>bis.</i>

Propriété de l'Auteur : GUILLAUME MERRER.



KANTIK ar C'HLEIER

HA BE SANT ERVOAN HELOUR !

Christenien deut gant fe
Sellaou c'hantie nevez
A zo gret d'ar chleier
Demeuz ha Landreguer

Ann escop n'deus badeet,
En illiz, er porchet
A distag deus traou ar bed
Ho mouez vezo klevet.

Brema oc'h da zoue,
A d'ann illiz ive,
Ho 'hano zo santel,
A d'ann illiz fidel.

Mintin, noz à Kreisde,
Canet teir gvoech bemde,
O salut *dudeus*,
D'ar Verc'hez, mam Jesus.

Pa zonzet ann offis,
Me redo d'ann illiz
Evit meuli Doue,
Gant ar re ho deuz fe.

D'ar zul, d'ar gouëlieu bras,
Sonnet mui vit biscoas
Ma teni ar gristenien
D'ann illiz, d'an oferent.

Pellat divar hon dro,
Tourmant ar kuruno.
Evit-ze oc'h binniguet,
Ken huel'n tour savet.

Pa ve ar buguel ganet,
Peb-unan hall laret
bis Zo eur c'hristen nevez
bis Gwir vuguel da Zoue

Paëron a Maëronnes
Karguet laouenidigues.
bis Ho teré'hel ar buguel
bis Da Zoue, vo fidel.

Compiri ar c'hleier,
En illiz Landreguer.
bis Assemblez gant an escop,
bis Dirak niver ar bob.

E miz maë tremenet,
Carilloni oa gret
bis Pevar gloc'h, re gaëra,
bis Er porchet o vrilla.

Dirak bras à bihan
Ho kleier sant Ervoan
bis E vo klevet o son
bis E c'hervel d'ar pardon.

D'ann naontek à viz maë
Pardon bras en de-ze
bis Parojou tro var dro
bis Vo en processionno.

Da nov eur sortiont
Vit mont d'ar pardon
bis Da zeg heur ofern bred
bis E minihi biniguet.

bis
bis

bis
bis

bis
bis

bis
bis

bis
bis

bis
bis

bis
bis

Ar c'hossa deñ er bed	A zo var c'huech pillier	<i>bis</i>
N'efe jamès guele	En illiz Landreguer.	<i>bis</i>
Vel pardon sant Ervoan	<i>bis</i> En tufot a zuc'h he ve	
Re vras à re vian	<i>bis</i> Guen en noz evel en de	
Brema sonfet cleier	En marb guen vo gret	<i>bis</i>
Da escop Landreger	C'haëra ouffet guele	<i>bis</i>
Pa deui da visita	<i>bis</i> Evel da oferenna	
He zenvet er ger ma.	<i>bis</i> Gant he habit caëra	
War ze assistanted	E vo laket var he vez	<i>bis</i>
Wirionez ansavet	He galis gantan ive	<i>bis</i>
Da zant Ervoan den mad	<i>bis</i> Hag e vo pardon caër	
A roi d'ec'h ho mennat.	<i>bis</i> Vinihi Landreguer.	
Pelerin sant Ervoan	Gant calz e vo frequentet	
Ne sonjo mui en poan	Ar be nevez vo gret.	
Me a gleo ar c'hleier	<i>bis</i> Re deus affliction	
O son e Landreguer.	<i>bis</i> A deuio d'ar pardon	
O c'hervel d'ar pardon	D'a bardon sant Ervoan	<i>bis</i>
Da gaout remission	A zo bet eun den à boan	<i>bis</i>
Dre-ze pelerinet	<i>bis</i> Demeus an dri ganton	
D'ho fec'het a remed.	<i>bis</i> Da Vinihi, d'ar pardon	
Sellaouet bras a bihian	Gant ho frocessionnou	<i>bis</i>
Bez n'Autrou sant Ervoan	Deus peurs à viraclou	<i>bis</i>
Zo bla ma nevez gret	<i>bis</i> Pa deuont d'obeissa	
Enn illiz vinniguet.	<i>bis</i> Da Jesus er bed-ma	
En illiz Landreguer	Da glevet an Aviel	<i>bis</i>
A zo savet bez caër	Ebars an illiz santel.	<i>bis</i>
Lec'h ma e enterret	<i>bis</i> Brema teuan da echui	
Gant honor, gant respect.	<i>bis</i> Hag ive d'ho saludi	
Kervarzin eo bet ganet	Vit ma vo gant Doue	<i>bis</i>
Eno eo bet marvet	Gloar hag eternite.	<i>bis</i>
E maneur bras Kervarzin	<i>bis</i>	
Leun à c'hraçou divin	<i>bis</i>	
E ve zo'n illiz gret	FIN	
C'haëra ouffet kavet		

Propriete GUILLAUME MERRER

CANTIQUE St-YVES

POUR 1887

REFRAIN

Saint Yves toujours près du Créateur,
Est pour la Bretagne un médiateur. (bis)

Son cœur était bon, sa voix était tendre,
De tous les endroits on venait l'entendre. (bis)

Il est dans le Ciel parmi ces élus,
Pour qui ne sont rien les biens superflus.

Saint Yves est né par grâce divine,
Non loin de Tréguier, près d'une colline

C'est à Kervazin, qu'il reçut le jour,
Ce Saint que partout on aime d'amour.

Son père et sa mère aimaient la Bretagne,
Comme le berger aime la montagne.

Ses parents avaient la crainte de Dieu
Et priaient souvent de dans le saint lieu.

Yves leur cher fils, quand il vient en âge,
Au collège apprend aussi davantage

En classe partout il est des plus forts,
Dieu du haut des cieux bénit ses efforts.

Lui, qui n'aimait plus que la solitude,
A Paris alla faire son étude.

Il passait son temps-là, tranquillement,
Et priait Jésus bien dévotement.

Il est le premier dans le séminaire,
Ces maîtres aimaient ce cœur généreux,

Trédrez, Louanec, ont eu pour curé,
Yves Héloury, l'homme vénéré.
Il était bien pour le prolétaire,
Et grondait tout haut l'inutilitaire.
Dans le sanctuaire il priait souvent.
Celui qui dirige à son gré le vent.
Toujours des pasteurs il est le modèle,
A lui rendre honneur chacun est fidèle.
Il est honoré partout dans l'Amor,
Son cœur pour le pauvre était un trésor.
Il jeûnait aussi chaque vendredi,
Et trois fois par mois pour le samedi.
C'est à Louanec, qu'il tomba malade,
Et son âme alla d'ici sans bravade.
A ces cinquante ans, Yves trépassa,
De ce monde au ciel son âme passa.
Sa tombe, à Tréguier, fait bien des miracles,
Malgré les méchants et tous leurs obstacles.
Son nom est par tout le monde estimé,
Il est jour et nuit des Bretons aimé.
Au fond du vallon et sur la montagne,
Saint-Yves prions gens de la Bretagne.
Saint Yves toujours près du Créateur,
Est pour la Bretagne un médiateur.

VINCENT COAT.



Moulet en ty P. LANOÉ, rue ar Pave, 7, Montroulez